

Intanv al Lochen



Er bed-man, nag aour nag arc'hant
Biskoaz en meuz staget va c'halon
Me n'on nemed eur c'noz paizant
Kontant on em c'hondision. (bis)

Mez ma fried karantezuz
A golon hirio pebez anken
Gwelet ez 'on ken maleurus
C'huec'h kraouadur em beuz em lochen.

En amzer ma oa beo ma fried
E furnez a charme va c'halon
Ma bugale oc'h va c'haret
A roche d'in gonsolation.

Beb eil a boken d'ezhie
Eun tad evrusoc'h na oa biken
Dre o jestou tener bemdeiz
Me oa c'hoaz euruz 'barz em lochen.

Braz oa al laouenedigez
Pa oan er gear gant va ziad
Ha pa welen va merc'hik kez
A teu an dour deuz va daoulagad.

Seblantout a ra d'in bembdeiz
Gwelet e mam baour en e c'hichen
En despet d'ar c'hunz diremed
Me oa c'hoaz euruz 'barz em lochen.

Ha mar gellon hep kaout miser
Sevel ha diski va bugale
Ha neuze c'hoaz gant an amzer
Fortuni ma merc'hik martreze.

Neuze va faotr a vo deut braz
Kapabl da labouraat an dachen
Em c'hozni me a c'hello c'hoaz
Beva evuruz 'barz em lochen.

Evrussoc'h c'hoaz me 'n em gavo
Po gwelin o c'honid o bara
Ha neuze pa teui ar maro
Euz ar vuhez-man d'am delivra !

Ma miSnouned va intero
Gant va fried pe en e c'hichen
Ha va bugale a ranno
Va zam tiegez ha va lochen !

Em gwele douar pa vezin
O repoz em bered Rumengol
M'ho ped kaout truez ouzin
O Itron Varia Remed-oll.

Ha pa teui va bugaligou
War va be da ober o feden
C'hui va Doue, a bardono
Da ene paour intanv al lochen.



Al Laouënan



Me zisplunfe d'oc'h eul laouenanik

A zo eul loenik ker bihanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan

Me zisplunfe teod d'al laouenanik,

E deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan

Me zisplunfe lagad d'al laouenanik

E lagad, e deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe penn d'al laouenanik

E benn, e iagad, e deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan

Me zisplunfe kouk d'al laouenanik

E c'houk, e benn, e lagad, e deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe kof d'al laouenanik

E gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe kein d'al laouenanik

E gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg, beg al laouenanik

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe morzed d'al laouenanik

E vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg,

Me zisplunfe troad d'al laouenan.

Me zisplunfe kar d'al laouenanik

E c'har, e vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg

Me zisplunfe troad d'al laouenan.

E droad, e c'har, e vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg,

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe ivin d'al laouenanik

E ivin, e droad, e c'har, e vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e deod, e veg

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

Me zisplunfe eskel d'al laouenanik

E eskel, e ivin, e droad, e c'har, e vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad, e

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

deod, e veg.

Me zisplunfe lost d'al laouenanik

E lost, e askel, e ivin, e droad, e c'har, e vorzed, e gein, e gof, e chouk, e benn, e lagad,

Me zisplunfe e droad d'al laouenan.

e deod, e veg.

Sethu displunvet tout al laouenanik !

MICHEL FLATRÈS.